

Sous ar Persoun.

par
Mr Quéré
Curi de
Chateaulin.

1

N'eus ket planedenn er bed
 Par d'hini ar Bersouned
 Ar Persoun a hell kutuil
 Plijadurion dioc'h an Duil.

Diskan.

Va zud, kredit ac'hanoun
 Ne ket droug beza persoun.

2.

Ar persoun en ilizou
 A bag^k an holl henorion:
 Stal alaoured dhe c'houroug
 Chap arc'hanted var e choug.

Diskan: Va zud ete

3

Sa vez eun eured en dro
 Ar Persoun eo e'r greio;
 Eur vadiziant vras pa ve,
 Ero 'r persoun 'zo adarte.

4

Mes, d'an anterramanchou,
He drotho ket an henchou;
Ar c'hure 'zastum bouillen,
Hag ar persoun aous melen.

5

D'ober enor eur pardoun,
Pion c'houlener? Eur persoun!
Ar Pet omnia 'zistago
Be, m'ar kar, e prezego.

6.

Ta zigouez en eur barrez
Eun Aotrou Persoun nevez,
Ar mear gant an esec'h mad
A ia var varc'h d'he gerc'had.

7.

Kement kloc'h a zo en tour
Erithan a vole flour;
K'anan, sakrist, ha kurust
Dirazhan a vale just.

12.

Ar persoun er presbital
A ren var ar seminal;
Ar friterez hag ar b'er
A renk ober dioc'h he c'her.

13.

Mestr eo da bod ar zouben,
Hea mestr d'ar gastoloren,
Da bodik rouz ar c'hafel,
D'ar billik ha d'an trebe.

14.

Eus a gement 'zo en ti
Den na gred sevel he fri
Nemet ar garabassen
A reouchou kalet a benn!

15.

An nep en eus great ar zoun
A garfe beza persoun;
Hag a reio en deis. se
Eur zoun all var ar c'hure?

Variante: Hta setu kloze
Eva
O chortoz
[perso]